

75

KLEMOU

EUR PLAH MANKET

Voar eun ton trist



Selaout brema va moez va hamaradezet
Houi pere em yoankis e meus bet cals caret
Eus a doulit ha ludu me ra deah va hlemou
Deut oll assemblies gani da versea ha taelou

Me meus kolet brema ma reputation
Ma haion a zo karget ha zezolation
Dre ma meus kredet siouas va fos camaradou
E meus collet ar haerra demeus va bouqejou.

Beteg vrema me haillai larea vouez huel,
E vouan kerra femeulen a oa en breiz izel
A brema me zo hudur en toez an ol verhet
Pa eo va haerra bouquet siouas gani collet

Henes oa karrea tenzor e oa barz er dedma
Ne gavin ket henep leah da brena sort deza
Dre vez deut da gredi camaret trøytour
E meus lezet va bouquet da vonet gant an dour

Pa dean d'examina ar vout rond deus ar bed
Siouas me vel varnaizi brema calz a verhet
Pere zo kolet gantai coulz a me ho rozen
O vez deut da flout en comzou treitourien

Va oll gerent zo siouaz gani dizinoret
Va chans zo dinatur va flaneden kalet
Va halon zo en irvout coulz en noz vel en de
Me a houlen ar maro vit disqen em be

Goudai va frajilitoi me zo oll an keniet
E compren barz stad trist pihini on rentet
Beteg brema me meus bed douget kokardeno
Brema e meus eur bissan eur vas da vont e dro

Beteg an noad a ugent vla me meurbet bevet
Ebarz en doujans Doue evel ma voa gleet
Neuzai me voa caret gant an oll em haatan
Neuzai camaradezet voa laoen va halon

Goudai me meus bet heulet kouls en nos a en de
Ar goel gompagnunez a voa barz em hontraï
Dre se me zo mepriset ebarz en breuzel
Va evrustet er bedma zo et gant an avel

Ne meus ket heullet siouas avis tad na mam
Dre ze ne meus get galet beva ive divlam
Groet e meus skouarn vouzar pa gleven anai
Koulskoudai deus bed laret ar virionais dimai

Lavaret zo bet dime gante sur aliez,
E heul goel gompagnunez mije tristedigez
Mes dre ma oan yoanc veprizan ho homzou
A ze ra dime brema scuil eu mor a zaelou

Ma mije bet hredret heullet ho gourhemen
Ma buez kamaradezet vije bet laoën
Mes pa meus get sentet brema demeus ar stur
Allas vit deus ar gorec e ranki ober zur

Noz a de he mon en neur stad trist meurbet
Avichou me un tam da zibri goechal ne vo ket
Goudai ma ve erh a scorn yen bras an avel
Keneut na mo get dober tan da doma ma bugel

Houi va hamaradezet goude va oll anqen
Deuio hoas dam goapad gant eur galon laouen
Mes ma kemerit an hent pehini zo danger
Houi pezo eveldon da zougen eur beh poner

Allas kamaradezet daou hent zo er bedma
An hini gemer an hent mad neus da zougen beb scan
Nep a gemer an hini fal bale voar va roujou
Neu eun poner da zougen a kals a dourmanchou

Vit var ma choue brema zo eur beh poner
Hag a meus deus e zougen cals a boan a miser
Dalhet vesin den douguen beteg fin va deiou
Adieu dan yaouankis ha dam pljaduriou

Tout droits réservés :

GUILLERMIC Yves.